

A VIZ GENVER DA VIZ MEURZH E BRO AN ORIENT
DE JANVIER À MARS AU PAYS DE LORIENT

40 VLEZ
ANS



DEIZIOÙ

TOMMËR AR BREZHONEG E-KREIZ AR GOUIAÑ V
FESTIVAL BRETON AU CŒUR DE L'HIVER

2025

FESTOÙ-NOZ · SONADEGOÙ FESTOÙ-NOZ · CONCERTS
PREZEGENNOÙ · DISKOUZADEGOÙ CONFÉRENCES · EXPOSITIONS
C'HOARIVA · ATALIEROÙ · KEGINEREZH... THÉÂTRE · ATELIERS · CUISINE...

www.emglevbroanorient.bzh



TRUGAREKADENNOÙ REMERCIEMENTS



NOS PARTENAIRES

Lorient Agglomération pour l'accueil de la cérémonie d'inauguration.
Le Conseil Régional de Bretagne, le Conseil Départemental du Morbihan, Kevre Breizh

LES MUNICIPALITÉS

Bubry, Caudan, Cléguer, Guidel, Hennebont, Inzinzac-Lochrist, Kervignac, Lanester, Languidic, Larmor-Plage, Lanvaudan, Locmiquélic, Lorient, Ploemeur, Plouay, Quéven, Quistinic, Riantec, Saint-Hélène

LES MÉDIATHÈQUES DU PAYS DE LORIENT

Particulièrement celles de Caudan, Guidel, Hennebont, Kervignac, Lanester, Languidic, Larmor-Plage, Locmiquélic, Lorient, Ploemeur, Riantec, Quéven

LES MÉDIAS

Ar Gedour, France Bleu Breizh Izel, J'aime Radio, Le Télégramme, Les Nouvelles, Lorient Mag, Ouest-France, Plum FM, Radio Balises, Radio Bro Gwened, Radio Korrigans, Radio Océane, RCF, RMN Radio et les services communications des différentes municipalités.

LES SALLES DU PAYS DE LORIENT

Les Arcs de Quéven, Amzer Nevez, L'Océanis, L'Espace des Médias et des Arts de Languidic, L'Estran de Guidel, Le Centre Jean Ferrat d'Hennebont, Le City de Lorient

SANS OUBLIER

LES 71 ASSOCIATIONS MEMBRES, ET EN PARTICULIER CELLES QUI PARTICIPERONT À L'ANIMATION DE CETTE ÉDITION 2025.

Daniel Doujet et Anaig Lucas pour la traduction en langue bretonne.

Ivonig Le Merdy et Charlotte Mallet, pour la coordination.

Gaëlle Maisonneuve (kemendall.fr) pour l'affiche et la mise en page.

Yves Jacob, Essylt Amos ..

Nos fidèles annonceurs.

L'ensemble des bénévoles sans qui ce festival ne pourrait exister et tous ceux que nous avons involontairement oubliés

Un grand merci à tous pour votre implication et soutien dans la réussite de nos Deizioù.

Les organisateurs se réservent le droit de modifier le programme.

Les entrées libres le sont dans la limite des places disponibles.

Roll an abadennoù klok àr / programme complet sur :
www.emglevbroadorient.bzh



TAOLENN SOMMAIRE



PENNAD-STUR I ÉDITO	4
MIZ GENVER I JANVIER	6
DISKOUZADEGOÙ I EXPOSITIONS	7
DARVOUDOÙ I ÉVÉNEMENTS	8
MIZ C'HWEVRER I FÉVRIER	11
DISKOUZADEGOÙ I EXPOSITIONS	12
DARVOUDOÙ I ÉVÉNEMENTS	16
MIZ MEURZH I MARS	29
DISKOUZADEGOÙ I EXPOSITIONS	30
DARVOUDOÙ I ÉVÉNEMENTS	31
DEIZIOÙ AR VUGALE I LES DEIZIOÙ DES ENFANTS	42
HAG IVEZ / ET AUSSI	48

À NOTER NOTENNIT

LES ÉVÉNEMENTS MARQUÉS
D'UN  SE DÉROULENT
EN BRETON

AN DARVOUDOÙ GET UN 
ZO DALC'HET E BREZHONEG

Le conseil d'administration d'Emglev Bro an Oriant est heureux de vous présenter le programme de la 40^{ème} édition des Deizioù, avec plus de 150 animations pendant deux mois. Un événement festif et accessible à tous, petits et grands, passionnés ou curieux !

Bon festival à tous !

Get plijadur vras e kinnig deoc'h kuzul-meriñ **Emglev Bro an Oriant** program 40vet blezad an Deizioù, get oc'hpenn 150 darvoud a-hed daou viz. D'ar re a oui penn ha d'ar re a zo é klask penn, d'ar re vras ha d'ar re vunut : darvoudoù bourrapl evit an holl !

Deizioù laouen d'an holl !



PENNAD-STUR

ÉDITO



Lorient Agglomération est très heureuse de soutenir et d'accueillir sur son territoire cette nouvelle édition des Deizioù. Ce festival permet de découvrir la culture et la langue bretonnes au plus grand nombre à travers une programmation toujours plus riche et variée au fil des éditions. Lorient Agglomération est un territoire vivant et fier de son identité. Notre projet de territoire porte l'ambition de faire de l'agglomération un territoire phare de la culture bretonne et celtique. De nombreuses actions de notre intercommunalité sont mises en œuvre pour promouvoir la culture et la langue bretonnes, notamment l'élaboration d'un schéma linguistique de la langue bretonne.

Je vous souhaite à toutes et tous de passer un festival des Deizioù 2025 et de profiter de cet événement pour vivre pleinement et partager la langue bretonne !



FABRICE LOHER

PREZIDANT AN ORIENTTOLPAD,
MAER AN ORIENT

PRÉSIDENT DE LORIENT AGGLOMÉRATION,
MAIRE DE LORIENT

Laouen eo An Orient Tolpad é harpiñ hag é tegemer an Deizioù er blez-mañ c'hoazh er vro. Er gouel-se e c'hell an holl gober anvedigezh get sevenadur Breizh hag ar brezhoneg get ur programm bepred puilhoc'h ha liesseurtoc'h a vlez da vlez. An Orient Tolpad zo ur c'hornad bev anezhoñ ha stad ennañ get e identelezh. Faotñ a ra deomp lakat an tolpad da vout douar skouer ar sevenadur breizhek ha keltiek. Ur bochad oberoù a vez lakaet e pleustr en hon etrekumunelezh evit brudiñ sevenadur Breizh hag ar brezhoneg, evel ur brastres yezh evit ar brezhoneg.

Hetiñ a ran deoc'h-holl gober bourrapl en Deizioù 2025 ha gober ho mad hag ar gouel-se evit beviñ ha diviziñ e brezhoneg betak penn !



Le festival des Deizioù, au cœur de l'hiver, montre que la culture bretonne est vivante toute l'année. Cette 40^{ème} édition, riche et variée, contribue à valoriser les droits culturels du peuple breton, notamment le droit d'accéder à la connaissance de son histoire, de sa culture et de sa langue. Cet événement est devenu un rendez-vous incontournable où chacun trouve son lien avec la Bretagne, qu'elle soit natale ou d'adoption. Suite au schéma linguistique voté en décembre, Lorient Agglomération s'engage à afficher, transmettre et faire vivre la langue bretonne. Le festival des Deizioù incarne cette identité vivante que nous devons entretenir et transmettre aux générations futures. Rendez-vous le 1^{er} février pour la soirée inaugurale à Amzer Nevez, prélude d'une belle édition des Deizioù !



LAURE LE MARÉCHAL

**KUZULIEREZ-KUMUNIEZH DILEURIET EVIT
AR BREZHONEG HA SEVENADUR BREIZH
EN ORIENT TOLPAD**

**CONSEILLÈRE COMMUNAUTAIRE DÉLÉGUÉE
EN CHARGE DE LA LANGUE ET DE LA CULTURE
BRETONNES À LORIENT AGGLOMÉRATION**

Festival an Deizioù, e-kreiz ar gouiañv, a ziskouez emañ bev sevenadur Breizh a-bad ar blez. Puihl ha liessort eo programm an 40vet festival, a zo daet da vout un abadenn ag ar re bouezusañ. Sikour a ra talvoudekaat gwirioù sevenadurel pobl Breizh, dreist-holl gwir ar Vretoned da anavet o istoer, o sevenadur hag o yezh. Roiñ a ra tro ivez da bep unan da gavet al liamm a zo etre eñ ha Breizh, ne verna ket hag e vro c'henidik e vehe pe pas. Ur brastres-yezh a oa bet votet e miz an Azvent get an Oriant Tolpad, abalamour da lakat ar brezhoneg àr wel, d'en deskiñ a-rumm-da-rumm ha da roiñ begon dezhañ. Festival an Deizioù zo un testeni ag an identelezh vev-se a zeleomp derc'hel bev ha treuzkas d'ar rummadoù a zay àr hol lerc'h. Emgav d'ar 1añ a viz C'hwevrer evit an nozvezh digoriñ en Amzer Nevez, e-raok roiñ lañs da abadennoù kaer an Deizioù !





DEIZIOTŪ

MIZ GENVER

JANVIER

DISKOUEZADEGOÙ EXPOSITIONS



VEN. GWE. 17.01 > MAR. MEU. 29.04

SOUVENIR D'UNE VAGUE LORÈNE ROULEAU



Un voyage, une plongée dans une mer fantasmagorique. L'ensemble des pièces crée un paysage maritime s'inspirant d'un réel qui devient fictif par les transformations graphiques apportées par l'artiste. Ainsi dans des forêts aquatiques se retrouvent des sardines pour boire un coup, tandis qu'au-dessus d'elles, des corps se dessinent au gré de l'eau.


Ur veaj, ur splujadenn e mor ur boemarvest. En em gavout a raer, dre holl ar pezhioù kinniget, en un dremmvro mor tost d'ar wirionded ha faltaziek neoazh dre ar c'hemmoù grafek degaset get an arzour. Ha setu, e koadoùier don ar mor, en em dola ar sardined evit evet un tasad tra ma spurmanter tres korfoù kaset ha degaset get lusk an dour.

HENBONT / HENNEBONT

ARTOTHÈQUE / CENTRE CULTUREL JEAN FERRAT
GRATUIT / DIGOUST | 02 97 36 48 74
VISIBLE AUX HORAIRES D'OUVERTURE

MAR. MEU. 21.01 > VEN. GWE. 21.02

DES NOUVELLES DU FOND DAMIEN ROUDEAU



Damien Roudeau, illustrateur et auteur de bande dessinée, installé à Locmiquélic, expose son carnet de reportage sur des sujets variés, comme les occupations d'usine ou les travailleurs du port de Brest.

Damien Roudeau, skeudenner ha saver bannoù-treset, staliet e Lokmikaelig, a zigor deomp e garneoù kelaouadennoù, a-zivout sujedoù a bep sort, èl gouzalc'herezh labouradegoù peotramant c'hoazh labourizion porzh Brest.

HENBONT / HENNEBONT

MÉDIATHÈQUE EUGÈNE GUILLEVIC
GRATUIT / DIGOUST | 02 97 36 53 02
VISIBLE AUX HORAIRES D'OUVERTURE

DARVOUDOÙ ÉVÈNEMENTS



SAM. **SAD.** 17.01

FILAJ VEILLÉE / BEILHADEG

Venez chanter, répondre, conter, écouter et faire la fête ! Un lieu chaleureux, possibilité de manger sur place (fromage/charcuterie). Cette veillée festive est organisée chaque 3^{ème} vendredi du mois par l'association *Ar Sklerijenn*.

Dait da ganal, da ziskaniñ, da selaou, da gontiñ ha d'ober bourrapl. Un davarn klet ha plijus, tu zo debriñ àr ar lec'h (fromaj/charkuterezh). Aozet e vez ur filaj bep miz, d'an trivet Gwener, etre miz Gouel-Mikêl ha miz Meurzh, get ar Gevredigezh *Ar Sklêrijenn*.

HENBONT / HENNEBONT

Orga. Sklerijenn Henbont

TAVARN TI GAR | 20:00 | GRATUIT / DIGOUST

ARSKLERIJENN.HENBONT@ORANGE.FR | 06 81 77 46 80

DIM. **SUL** 18.01

CHANSONS TRADITIONNELLES DE HAUTE-BRETAGNE CONCERT | SONADEG



Chansons de Haute-Bretagne revisitées à partir du répertoire de **Clémentine Jouin**, chanteuse traditionnelle du pays de Redon. **Eva Cloteau** (violoncelle et chant) / **Carmen Leroy** (flûte) / **Maxime Lhermitte** (chant et guitare).

Sonnenoù a Vreizh-Uhel adkempennet adal re Clémen-

tine Jouin, kanerez hengounel a vro Redon. **Eva Cloteau** (gaolviolin ha kan) / **Carmen Leroy** (flaouit) / **Maxime Lhermitte** (kan ha gitar).

PLOUE / PLOUAY

Orga. Mairie de Plouay

SALLE DES FÊTES | 20:30 | GRATUIT / DIGOUST

02 97 33 31 51

VEN. **GWE.** 24.01

CROQUEURS DE BULLES BANDE DESSINÉE | BANN TRESET

Le rendez-vous des amateurs du 9^{ème} art !

Une fois par trimestre, les Croqueurs de bulles échangent leurs points de vue sur une sélection de 6 titres proposés lors de la séance précédente. Bande dessinée, comics, manga, roman graphique... il y en a pour tous les goûts ! On discute, on débat, on décortique le graphisme, le scénario... C'est aussi l'occasion d'échanger sur les derniers coups de cœur de chacun et parfois même de découvrir en avant-première les dernières acquisitions de la médiathèque.

Emgav an dud stummet get an 9^{vet} arz !

Ur wezh bep trimiziad en em vod ar gevredigezh « Croqueurs de bulles » evit komz a-zivout un dibab 6 oberenn kinniget en abadenn a-raok. Bannoù-treset, komiks, mangaioù, romantoù grafek... Da bep unan e choaz ! Diviz a raer, tabutal a raer, diefelfenniñ a raer an tres, ar steuñvenn... Un digarez eo ivez evit komz diàr-benn taolioù-kalon diwezhañ ar berzhidi ha dizoleiñ gwezhave zoken, a-raok ne vern piv, prenadennoù diwezhañ ar vediaoueg.

HENBONT / HENNEBONT

Orga. Médiathèque Eugène Guillevic

19:00 | GRATUIT / DIGOUST | 02 97 36 53 02

SAM. SAD. 25 & DIM. SUL 26.01

COMPTAGE DES OISEAUX DE JARDIN KONTIÑ EVNED AR JARDRINOÙ



Le comptage des de jardin est une opération nationale qui vise à recenser, de façon ponctuelle, l'abondance des principales espèces d'oiseaux fréquentant les jardins en hiver, pour sensibiliser et informer sur les oiseaux les plus communs.

En 2024, près de 4 500 jardins ont été suivis en Bretagne historique. Les résultats sont disponibles sur le site interactif dédié : https://diffusion.bretagne-vivante-dev.org/ORA/oiseaux_des_jardins/

Niveradeg evned ar liorzhoù a zo ur genoberiantiz er vro a-bezh, da bal dezhi renabliñ, a vareadoù resis, paoted spesadoù pennañ ar laboused a vez é hantiñ hor jardrinoù d'ar gouiañv, evit kizidikaat an dud, ha reiñ doare dezhe diàr-benn an evned boutinañ.

Tost da 4 500 liorzha a zo bet arsellet e Breizh hag er Liger-Atlantel er blez 2024 ! An disoc'hoù a c'heller lenn àr ar lec'hienn « oiseauxdesjardins »

Orga. Bretagne Vivante
WWW.BRETAGNE-VIVANTE.ORG

SAM. SAD. 25.01

CLAQUETTES IRLANDAISES STLAKEREZIOÙ IWERZHON STAGE DE DANSE / STAJ DAÑS



Animé par Maëlyss Gerot.
Kaset get Maëlyss Gerot.

KEWENN / QUÉVEN

Orga. Air d'Eire

SALLE KERLEBERT 1 15€/20€ 1 MATIN | AIRDEIRE@GMAIL.COM

SAM. SAD. 25.01

FEST-NOZ «LES AMIS DE JOHANNA»



Soirée animée par les groupes **Arvest**, qui combine chant traditionnel et créations nouvelles au service de la danse bretonne avec des textes actuels, **Damat**, dont la musique se caractérise par sa base traditionnelle assurée par la bombarde et l'accordéon diatonique, agrémentée d'accents modernes issus de la guitare acoustique, de la basse et de la batterie, et le **Duo Le Guennec**. Les bénéfices seront reversés à l'association «Les Amis de Jo-

hanna», fondée en 1997 pour venir en aide à Johanna, polyhandicapée de naissance.

Nozvezh kaset get ar strolladoù **Arvest**, kan hengounel ha krouidigezhioù nevez evit lakaat an dud da zañsal krolloù Breizh àr destennoù a-vremañ.

Damat, sonerezh hengounel a-drugarez d'ar vombard ha d'an akordeon diatonek, kaeraet get son arnevez ar gitar-sec'h, ar gitar-boud hag an talmadurioù, hag an **Daouad Le Guennec**. Holl ar gounidoù a yad d'ar gevredigezh «Les Amis de Johanna», savet e 1997 evit harpiñ Johanna, liesnammet a-vihan.

SANTEE-ELEN / SAINTE-HÉLÈNE

Orga. *Les Amis de Johanna*
06 08 58 86 36

DIM. **SUL** 26.01

FEST-DEIZ DES FILIÈRES BILINGUES DE PLŒMEUR ET LORIENT

DIV YEZH AN ORIENT HA PLAÑVOUR A GINNIG DEOC'H UR

FEST DEIZ

Ploemeur
à l'Océanis

**KRAAZ
TRIO INORZEN
LES ACCORDEONS D'ALAIN PENNEC**

À PARTIR DE
15H00

**DIMANCHE
26
JANV**

✓ Entrée à partir de 3€
✓ Crêpes & boissons

div yezh Plañvour
div Yezh an Oriant
BREIZH TRIO AL CORRE

Animé par **Kraaz, Jaffre/Le Bozec/Chapron** et les accordeonistes d'Alain Pennec.

Kraaz, composé de Pierre Gateclou-Marest, Arthmael Giraudon, Maxime Le Bouar et Judikaël Le Corre, est un

quartet percutant faisant la part belle aux terroirs morbihannais, et affirmant la vivacité de ses répertoires à danser. Pour célébrer et exalter cette fameuse transe des festoù-noz, ils n'hésitent pas à puiser jusque dans les rythmiques tribales de la drum'n bass ou de la techno, pour le plaisir des danseurs.se.s les plus aventureux.se.s.

Kaset get **Kraaz, Jaffre/Le Bozec/Chapron**.

Ennañ Pierre Gateclou-Marest, Arthmael Giraudon, Maxime Le Bouar ha Judikaël Le Corre, Kraaz a zo ur pevarad nerzhus, hag a ro al lodenn gaerañ da zañsoù Bro-Gwened, hag a vroud ar c'hlan da zañsal. Evit gober ton ha lid da dreanterezh ken brudet ar festoù-noz, ne zougont ket monet da besketat betek e-barzh ritmoù meuridoù an drum'n bass peotramant c'hoazh an tekno, evit plijadur an dañserion hag an dañserezed diambac'hañ.

PLAÑVOUR / PLŒMEUR

Orga. *Div Yezh Plañvour*
SALLE Océanis | 5€ / GRATUIT POUR LES ENFANTS | 15:00
DIVYEZH.PLANVOUR@GMAIL.COM

MAR. **MEU**. 28.01

«LA CHOUANNERIE EN BRETAGNE» PAR MICHEL LE COZ CONFÉRENCE / PREZEGENN

«Cette conférence sur le thème de la Chouannerie (1791-1800) se proposera de vous faire découvrir les particularités de ces mouvements populaires paysans contre révolutionnaires qui vont concerner, outre la Bretagne, tout le quart Nord Ouest de la France. Les membres de ces soulèvements s'érigent en réaction d'opposition à une République jacobine et centralisatrice qu'ils ne comprennent pas et qui bouscule leurs croyances et leurs habitudes. Pour eux « Doue ha mem Bro » (Dieu et mon Pays) n'étaient pas de vains mots.»

«Ar brezegenn-mañ, àr dem ar Chouanerezh (1791-1800) a ginnigo deoc'h dizoliñ ar luskadoù pobl diàr ar maez enep an Dispac'h, hag a vo kavet, en tu 'rall da Vreizh, en ur lodenn vras a gard kornog Bro-Frañs. An dud a oa en emsaviù-se a oa enebet-groñs d'ur Republik Jakobin ha kreizennoez, na oant ket evit kompren, hag a wallgase o c'hredennoù hag o boazioù. Evite ne oa ket komzoù toull lâret "Doue ha mam Bro".

KEWENN / QUÉVEN

Orga. *Spered Kewenn*
SALLE LES ARCS | 7€ | 18:30 | 06 63 38 31 20



DEIZIOŨ

MIZ C'HWEVRER

FÉVRIER

DISKOUEZADEGOÙ EXPOSITIONS



SAM. SAD. 01.02 > SAM. SAD. 22.02

BRUCERO, L'ALCHIMAGE



Brucero, né à Lorient, est un passeur utilisant le langage graphique qu'est la peinture pour nous emmener vers l'autre monde.

Peintre du monde celtique et féerique, son univers coloré et poétique rend grâce aux esprits de la nature, de Brocéliande à Avalon. Il manie des techniques traditionnelles à l'eau, comme l'acrylique et l'aquarelle, avec un souci du détail qui donnent à ses créations une matérialité forte. Peaux diaphanes, végétaux exubérants, ailes éthérées, regards à fleur d'âme...

Par un travail méticuleux, cet artiste lève le voile sur des mondes imaginaires, oniriques, fantasmagoriques inspirés par les nombreux contes et légendes de la Bretagne où il réside.

Brucero, ganet en Oriant, a zo un treizhour hag a ra get yezh ar gevregenn, èl m'emañ ar liviñ, evit hon ambroug trema ar bed arall.

Livour ar bed keltiek ha marzhus emañ-eñ, livour ur bed lan a livioù hag a varzhoniezh, tuet da ziskouez grad-vat da speredoù an natur, a Vreselien da Avalon. Gober a ra get teknikoù hengounel diàr zour, evel an akirleg hag an dourliv, get un albec'henn taolet àr ar munudoù hag a ro d'e grouidigezhioù neuz kreñv ar gwirion. Kroc'hen damvoull e dudenoù, struzh diroll e daolenoù, eskell eteret, selloù dezhe flourded an enean... Dre e labour pervezh, e tigor deomp an arzour-mañ dorioù bedoù ar faltazi, an hunvre, ar boemarvest daet dezhañ diàr lenn ar c'hontadennoù hag ar mojennoù ken stank e Breizh, al lec'h m'emañ é chom.

AN ORIENT / LORIENT

MÉDIATHÈQUE FRANÇOIS MITTERRAND
DIGOUST / GRATUIT | 02 97 84 33 60
VISIBLE AUX HORAIRES D'OUVERTURE

DE FÉVRIER À NOVEMBRE A VIZ C'HWEVRER DA VIZ DU

SAINTE-HÉLÈNE DANS LA GUERRE 39/45

Une 1^{ère} partie est consacrée à la vie quotidienne et aux événements qui ont directement touché Sainte-Hélène, et la 2^{ème} concerne plutôt tout ce qui se passait autour depuis le maquis, les combats de la Poche de Lorient,

Ar lodenn gentañ a zo diàr-benn ar vuhez pemdeziek hag an darvoudoù degouezhet da vat e Santez-Elen, hag an eil a zo kentoc'h diàr-benn ar pezh a oa de-

gouezhet er c'hornad tro-ha-tro, an harzerezh hag emgannoù Sankenn an Oriant.

SANTEE-ELEN / SAINTE-HÉLÈNE-SUR-MER

Orga. Commune de Sainte-Hélène
SALLE DU CONSEIL
GRATUIT / DIGOUST | 02 97 36 64 36
VISIBLE AUX HORAIRES D'OUVERTURE

LUN. LUN 03.02 > DIM. SUL 23.02

LES QAIS DE KERGROISE

AOSTEN



Le remorqueur «Morbihan» indispensable pour accueillir les cargos à Kergroise !

Ariel Piou dit Aosten (www.aosten.bzh) demeurant à Lanester donne à voir quelques œuvres, toutes issues des quais de Kergroise et de l'anneau de réparation navale. « Je suis un photographe immobile... Plutôt que polluer pour aller saisir des images à l'autre bout du monde, j'attends que les navires viennent à Lorient. Je me rends au port en vélo si possible et réalise mes tirages numérotés jusqu'à 30 avec un labo du pays de Lorient, des encres sans solvant sur un support recyclable ». Aosten, Académicien des Arts et Sciences de la Mer inscrit son travail artistique dans une dynamique de valorisation du territoire en s'appuyant sur son passé pour le rendre présent ... en donnant des couleurs à l'avenir !

Ariel Piou, hag a raer ivez Aosten anezhañ; a zo é chom e Lannarstêr. Diskouez a ra un nebeud oberennoù, an holl anezhe daet a gaeoù Kergroaz, hag ag an tachad eeunñ-bigi. « Ur skeudenner difich on-me... Kentoc'h evit kousiñ an natur en ur vonet d'ober skeudennoù e penn arall ar bed e kavan gwel gortoz ma tay ar bigi d'an Oriant. Monet a ran d'ar porzh get mam belo, mar bez tu, hag e ran tennadennoù niverennet betek 30 get ur labourdi a vro an Oriant, livioù hep dileizher à un danvez aes da adroudeniñ ». Aosten, Akademisian Arzoù ha Skiantoù ar Mor a laka e labour e stern ul lusk talvoudekaat an tiriad, doc'h en em servij ag e amzer dremenet evit en adveññ bremañ... get livioù roet d'an amzer da zonet !

AN ORIENT / LORIENT

VILLE DE LORIENT / EMGLEV BRO AN ORIENT
RESTAURANT MUNICIPAL | GRATUIT / DIGOUST
VISIBLE AUX HORAIRES D'OUVERTURE

MAR. MEU. 04.02 > JEU. YAOU 27.02

COQUES EN STOCK

GÉRARD DARRIS



Gérard Darris expose ses dessins et peintures réalisés principalement à l'aquarelle. Ils font partie de l'ouvrage «A sec ! Portraits de 50 navires sous la ligne de flottaison», croqués sur l'aire de réparation navale de Lorient Keroman et autres ports bretons. Le vendredi 7 février 2025 à 15h, rencontre dédicace avec Gérard Darris et venue des Editions La Nouvelle Bleue qui présenteront leurs ouvrages sur la Bretagne.

Kinnig a ra **Gérard Darris** e dresadennoù ha livadennoù, dourliv ar muiañ-bras anezhe. Emaint en oberenn «A sec ! Portraits de 50 navires sous la ligne de flottaison» primdreset getañ à leur eeunñ-bigi Keroman hag e porzhioù arall Breizh ivez. D'ar Gwener 7 a viz C'hwevrer 2025, da 3 eur d'ender, emgav-sinadur get Gérard Darris. Eno e vo ivez un Embannadurioù La Nouvelle Bleue evit kinnig o oberennoù diàr-benn Breizh.

LANGEDIG / LANGUIDIC

HALL DE L'ESPACE DES MÉDIAS ET DES ARTS
GRATUIT / DIGOUST | 02 97 65 19 18
VISIBLE AUX HORAIRES D'OUVERTURE

MAR. MEU. 04.02 > VEN. GWE. 28.02

VIVRE LA GUERRE AU PAYS DE LORIENT (1939-1949)



Grandes dates et faits historiques y sont mis en image, pour mieux comprendre l'histoire de la Poche de Lorient et son contexte, dès le début de la guerre en 1939, et jusqu'aux lendemains de guerre en 1949.

Pilotée et produite par Lorient Agglomération, l'exposition est réalisée par le service patrimoine et archives de la Ville de Lorient, sous l'égide d'un conseil scientifique réunissant chercheurs et professionnels du patrimoine, représentatif de l'ensemble du territoire de la Poche de Lorient.

Deiziadoù bras ha fedoù istorel a vo kavet e stumm skeudennoù, evit kompren gwell istor Sankenn an Oriant hag an endro anezhi, adal penn-kentañ ar brezel e 1939 tre-betek tronozioù ar brezel hag ar blez 1949.

Renet ha darbaret get an Oriant-Tolpad, emañ bet kempennet an diskouezadeg-mañ get Servij ar Glad ha Dielloù an ti-Kêr, edan renerezh ur c'huzul skiantel, bodet ennañ klaskerion hag arbennigerion àr ar glad, daet a bep korn a dolead Sankenn an Oriant.

KAODAN / CAUDAN
MÉDIATHÈQUE/ LORIENT AGGLO
GRATUIT / DIGOUST | 02 97 80 50 55
VISIBLE AUX HORAIRES D'OUVERTURE

MAR. MEU. 18.02 > DIM. SUL 16.03

LE PRINTEMPS - NEVEZAMZER PASCAL JAOUEN



« Brodeur, styliste, **Pascal Jaouen** a su remettre au goût du jour la broderie traditionnelle. Venez découvrir sa collection haute-broderie « Le Printemps » qui met à l'honneur des pièces uniques et colorées brodées main, reprenant les codes du vestiaire traditionnel breton. Un hommage à la nature bretonne qui se déploie avec élégance sur des broderies mêlant fils de soie et perles de verre, landes mystérieuses et paysages oniriques ».

Pascal Jaouen, brodour ha stilour, a zo daet da benn a hizivaat broderezh hengounel ar vro. Dait da zizoloiñ e zastumad uhelvroderezh nevez « Le Printemps » hag a laka er gouloù pezhioù dibarek, livadennet ha brodet get an dorn, en ur zoujiñ da godoù dilhad hengounel hor bro. Ton bras a ra dre-se da natur Breizh a weler displeget get kranded àr e bezhioù broderezh hag a liamm neud seiz ha perlennoù gwer, lannoù kevrinus ha dremmvroioù hunvreek.

RIANTEG / RIANTEC
MAIRIE DE RIANTEC
ESPACE CULTUREL DE KERDURANT
GRATUIT / DIGOUST | 02 97 33 52 40
VISIBLE AUX HORAIRES D'OUVERTURE

MAR. MEU. 24.02 > SAM. SAD. 22/03

DANSE BRETONNE : ENTREZ DANS LA RONDE

DAÑS MOD BREIZH : DAIT EN DRO PHOTOGRAPHIES DE SERJ PHILOUZE

Une exposition de l'artiste photographe **Serj Philouze** des danseurs et danseuses du cercle celtique de Lanester «fistouled ». Plus photos amateurs du cercle Fistouled.

Skeudennoù get **Serj Philouze** ha get Kelc'h Keltiek Lannarstêr.

LANN-AR-STÊR / LANESTER

MÉDIATHÈQUE ELSA TRIOLET,

CERCLE CELTIQUE DE LANESTER

HALL DE LA MÉDIATHÈQUE | GRATUIT / DIGOUST

02 97 89 00 7 | VISIBLE AUX HORAIRES D'OUVERTURE

MAR. MEU. 25.02 > SAM. SAD. 22/03

LE CUIR DE NOS LIBÉRATEURS JAGENNOÙ LER HON DIEUBERION



Présentation de 20 reproductions de blousons de vol d'équipages américains tombés dans le Morbihan, durant la Seconde Guerre Mondiale. Les blousons sont accompagnés de 20 panneaux présentant les crashes.

Visite guidée samedi 1^{er} mars à 11h.

Kinnig 20 eilskouer jagennoù nijerion amerikan kouezhet er Morbihan e-pad an Eil Brezel-Bed. Da heul ar jagennoù e vo kavet 20 panell lec'h ma weler ar c'hirri-nij diskaret.

Gweladenn ambrouget d'ar Sadorn 1 a viz Meurzh da 11 eur vintin.

KERVIGNAG / KERVIGNAC


ASSOCIATION AIR MÉMORIAL

MÉDIATHÈQUE | GRATUIT / DIGOUST | 02 97 65 64 44

VISIBLE AUX HORAIRES D'OUVERTURE

MAR. MEU. 25.02 > SAM. SAD. 15.03

CHANTER EN BRETON À L'ÉCOLE KANAÑ ER SKOL



Cette exposition bilingue autour des chansons en breton, élaborée et conçue par TES, est une poursuite de l'album- CD « 1, 2, 3, Kanañ a ri ! ». Fruit d'un travail approfondi sur le chant breton dans l'enseignement, elle propose un parcours pédagogique pour aborder la culture du chant breton à l'école et l'inscrire dans les apprentissages scolaires. Elle comporte 15 panneaux explicatifs, qui traitent des chants, du répertoire d'hier et d'aujourd'hui, de l'histoire de leur enseignement à l'école, des concours de chants, des publications (livres, disques, CD), de la transmission entre générations, des chanteuses et chanteurs d'aujourd'hui ou encore de l'intérêt de chanter à l'école.

An diskouezadeg-mañ, diàr-benn ar sonennoù e brezhoneg, ijinet ha fardet get TES, a zo kendalc'h an albom-CD kentañ « 1, 2, 3, Kanañ a ri ! ». Discoc'h ur labour hir ha don diàr ar c'han e brezhoneg er skolioù eo, ha kinnig a ra un treuz pedagogel evit dizoloñ ar c'han brezhonek er skol hag er lakaat en danvezioù da zeskiñ. 15 panell displegiñ a zo enni hag a gomz ag ar c'han, a sonennoù an amzer gozh koulz èl sonennoù hon amzer a-vremañ, ag istor ar c'heleñn anezhe en deskadurezh, ag ar c'henstrivadegoù kanal, ag an embannadurioù (levrioù, pladennoù, CD-où), ag an treuzkas etre ar rummadoù, ag ar garterion ha kanerezed a hiriv pe c'hoazh ag ar splot a zo é ober get ar c'han er skolioù.

GWIDEL / GUIDEL

MÉDIATHÈQUE

GRATUIT / DIGOUST | 02 97 65 05 30

VISIBLE AUX HORAIRES D'OUVERTURE

DARVOUDOÙ ÉVÈNEMENTS



SAM. SAD. 01.02

DISONS DES CHANSONS ! LARAM' SONENNOÙ !

STAGE DE CHANT / STAJ KAN

Pour chanter en breton avec **Cédric Binet**, l'école de musique Sonam' vous propose un nouveau format : 3 x 3 heures, 3 samedis matins en février et mars 2025 pour pratiquer le chant en breton vannetais. Une restitution est proposée (conseillée, mais pas obligatoire !) le 22 mars lors de la journée festive à Sainte Hélène où le chant trad' s'exprimera lors de la balade musicale, de l'apéro chanté, du fest-noz...

Evit kanal e brezhoneg get **Cédric Binet** e kinnig deoc'h skol ar sonerezh Sonam' un heuliad nevez : 3 gwezh 3 euriad, 3 Sadorn vintin e miz C'hwevrer ha Meurzh 2025, evit kanal e brezhoneg Gwened. Kinniget e vo ur restao-ladenn (alijet, met pas rediet neoazh) e-pad an devezh gouel e Santez-Elen, lec'h ma vo kanet mod-kozh er valeadenn sonet, en digor-kalon kanet, er fest-noz...

KERVIGNAG / KERVIGNAC

Orga. Ecole de musique Sonam'

SALLE KERNOURS 19:30 > 12:30

CYCLE DE 3 ATELIERS : 65€ + ADHÉSION DE 30€

07 54 36 94 45

SAM. SAD. 01.02

SUR LE PONT WAR AR PONT

Les militants de Bretagne Réunie - Pays de Lorient se réunissent chaque 1^{er} samedi du mois pour revendiquer la Bretagne à cinq départements.

Stourmerion Breizh Unvan Bro an Oriant a dolp an dud bep kentañ Sadorn ar miz evit sammiñ Breizh get pemp departamant.

LANN-AR-STËR / LANESTER

Orga. Bretagne Réunie - Breizh Unvan

PONT DE KERPONT-LANESTER I 14:00

DIGOR D'AN HOLL / OUVERT À TOUS



SAM. SAD. 01.02

INITIATION AU BRETON UN TAÑVA D'AR BREZHONEG STAGE / STAJ

L'association Ar Sklêrijenn vous invite à découvrir la langue bretonne en apprenant à compter jusqu'à 20, des expressions du quotidien, les noms de familles et de lieux, ... Ouvert aux débutants, adultes et enfants à partir de 12 ans.

HENBONT / HENNEBONT

Orga. Ar Sklêrijenn

MÉDIATHÈQUE I 14:30 I DIGOUST / GRATUIT

06 81 77 46 80 I ARSKLERJENN.HENBONT@ORANGE.FR

SUR INSCRIPTION, PLACES LIMITÉES

SAM. SAD. 01.02

RÉPÉTITION PUBLIQUE DU BAGAD PLEUSTRADENN FORAN BAGAD SONERIEN AN ORIENT



Répétition publique du **Bagad Sonerien an Oriant** avant la première manche du Championnat de Bretagne à Brest.

Pleustradenn digor ar **Bagad Sonerien an Oriant** a-raok kentañ krogad Kampionad Breizh ar Bagadoù e Brest.

LOKMIKAELIG / LOCMIQUÉLIC

Orga. Ville de Locmiquélic & Bagad Sonerien an Oriant

SALLE L'ARTIMON I 18:00 (LES HORAIRES SONT SUSCEPTIBLES

DE CHANGER I DIGOUST / GRATUIT

SONERIENANORIENT@GMAIL.COM



GRAND CONCERT D'OUVERTURE DIGOR-LID / INAUGURATION

SAM. SAD. 01.02

ANNIE EBREL : AN EBATOÙ



L'une des plus belles voix du chant breton actuel, **Annie Ebrel** revient à l'essence de sa vocation : le chant accompagnant la danse. Elle questionne la place de la danse dans la tradition populaire chantée. Ce tout nouveau spectacle raconte ainsi les joies, les peines, les drames et les croyances, la vie qui s'articule autour du plaisir partagé de la ronde.

Annie Ebrel a zo unan a gaerañ bouezhioù a fehec'h kavout e Breizh hiriv an deiz. Distroñ a ra d'he mammenn : ar c'han evit monet da heul an dañs. En em c'houlenn a ra pe lec'h en deus an dañs en hengoun pobl kanet. An abadenn nevez-flamm-mañ a gont èl-se levezioù ha poanioù, dramaioù ha kredenoù, ar vuhez é tibun èl ma tibun plijadur rannet un dro-koroll.

PLAÑVOUR / PLÈMEUR

Orga. Amzer Nevez / Emglev Bro an Oriant / Lorient Agglo
AMZER NEVEZ | 20:30
DIGOUST / GRATUIT | 02 97 86 32 08

DIM. SUL 02.02

DAIT DA ZAÑSAL : TERROIR DU POHER STAGE DE DANSE BRETONNE STAJ DAÑS BREIZH

Animé par le **Cercle Brug ar Menez**. Les danseurs du cercle entretiennent, depuis sa création en 1947, un esprit de famille et de solidarité qui se ressent sur scène et qui constitue sa popularité dans le respect des traditions du Pays Montagne.

Kaset get ar **C'helc'h Brug ar Menez**. A-c'houde m'emañ bet savet, er blez 1947, o deus dalc'het an dañserion d'ur spered familh ha kengred hag a zispakont splann àr ar leurenn, setu ar pezh a ra dezhe bout ken poblek, ha ken doujus doc'h hengounioù Bro ar Menez.

KEWENN / QUÉVEN

Orga. Emglev Bro an Oriant
CENTRE CULTUREL LES ARCS | 9:30 | 5€
02 97 21 37 05 | EMGLEV@EBO.BZH

DIM. SUL 02.02

RÉPÉTITION PUBLIQUE DU BAGAD PLEUSTRADENN FORAN BAGAD SONERIEN AN ORIENT

Répétition publique du **Bagad Sonerien an Oriant** avant la première manche du Championnat de Bretagne à Brest.

Pleustradenn digor ar Bagad Sonerien an Oriant a-raok kentañ krogad Kampionad Breizh ar Bagadoù e Brest.

LOKMIKAELIG / LOCMIQUÉLIC

Orga. Ville de Locmiquélic & Bagad Sonerien an Oriant
SALLE L'ARTIMON | 17:00 | DIGOUST / GRATUIT
SONERIENANORIENT@GMAIL.COM
LES HORAIRES SONT SUSCEPTIBLES DE CHANGER

MER. MER. 05.02

THE SILENCERS CONCERT / SONADEG

Le groupe écossais formé par **Jimme O'Neill** revient aujourd'hui avec un dixième album : *Silent Highway*. La recette reste inchangée. Des morceaux méticuleusement fabriqués de manière artisanale, des mélodies exaltantes et des textes sensibles. Les douze titres qui composent *Silent Highway* sont habités d'un groove hypnotique qui fait taper du pied ou danser sur des paroles aussi bien authentiques, sincères ou irréelles que politiques, ironiques ou amusantes.

Ar strollad skosat savet get **Jimme O' Neill** a zo distro hiriv get un dekvet pladenn : *Silent Highway*. Kemm ebet er rekiye. Tammoù fardet pervezh-mat en un doare artizanel, melodiennoù entanus ha testennoù kizidik. An daouzek titl a zo àr *Silent Highway* a zo intret get ur groove teogus hag a ra d'an dud pilat o zreid pe dañsal àr gomzoù gwirion, didro ken aes èl re hunvreadek, politik, damc'hoapaus pe farsus

PLAÑVOUR / PLÈMEUR

Orga. Salle Océanis

SALLE L'Océanis | 20:00 | 35€ | 02 97 86 41 16



VEN. GWE. 07.02

APÉRO FESTIF EN LANGUE BRETONNE BANNE GWENER

Venez échanger en breton pour cet afterwork dédié à notre langue régionale ! Cette rencontre est organisée tous les 1^{ers} vendredis du mois par **Ar Sklêrijenn**. Et toujours, des assiettes de fromages, de charcuteries ou des tartinades dès 18h !

Dait da lâred kaer e brezhoneg e-pad an tolp -se... Saved e vez an degouezh-se bep Gwener kentañ ar miz ged **Ar Sklêrijenn**. Ha bepred, pladadoù formaj, charcuterezh ha meuzioù goustabl da lediñ adal 6e gm !

HENBONT / HENNEBONT

Orga. Ar Sklêrijenn

TAVARN TY GAR | 18:00 | 06 81 77 46 80

SAM. SAD. 08.02 & DIM. SUL 09.02

LA VIE EN BULLES, 4^{ÈME} ÉDITION FESTIVAL BD / FESTIVAL BT



La thématique choisie pour cette quatrième édition sera « La guerre 39-45 en Bretagne ». Présence de quatre auteurs de bandes dessinées ayant publié récemment une œuvre sur le thème de la dernière guerre en Bretagne pour des séances de dédicace (leurs BD étant vendues sur place par les libraires partenaires du festival). Table ronde sur la guerre 39/45 en Bretagne avec deux ou trois auteurs et témoins ou historiens.

An tem dibabet evit ar pevarvet festival-mañ a zo "Ar Brezel 39-45 e Breizh". Eno e vo pevar aozer bannoù-treset embannet gete a-nevez-'zo un oberenn a-zivout an Eil Brezel-Bed e Breizh. Emgav get ar lennerion ha sinadur (Gwerzhed e vo o bannoù-treset àr ar lec'h get levrdiourion kevelet get ar festival). Taol-grenn diàr-benn ar brezel 39-45 e Breizh get daou pe tri skrivagnour, testoù, hag istoerion.

SANTEZ-ELEN / SAINTE-HÉLÈNE

Orga. Association La Pach

SALLE BEG ER LANN | 10:00 > 18:30 | 2€ | 02 97 36 64 36



SAMEDI SADORN 08.02

CAFÉ CAUSERIE EN BRETON KAFE FLAPIÑ E BREZHONEG

Sur le thème des jeux de société.

Àr dem an c'hoarioù kevredigezh.

AN ORIENT / LORIENT

Orga. Médiathèque / Emglev Bro an Oriant

KIOSQUE DE LA MÉDIATHÈQUE FRANÇOIS MITTERRAND

15:00 | DIGOUST / GRATUIT | 02 97 84 33 60

SAM. SAD. 08.02

FEST-NOZ DE LA FÉE VRILLÉE



Animé par **Imleh, Kanerhog, Safar, Nicol/Le Forestier**. Kanerhog propose depuis 20 ans un répertoire de chants à répondre issu du pays de Lorient et du pays Pourlet. Anne-Marie Nicol et Céline Le Forestier sont un couple biniou-bombarde, dont les répertoires de prédilection sont les répertoires vannetais et pourlet. Venez au fest-noz habillé en fée !

Kaset get **Kanerhog, Nicol/Le Forestier, Imleh ha Safar**. Kanerhog a ginnig a-c'houte 20 vlez 'zo kanennoù da respont dastumet e kornad an Oriant hag er vro Pourlet. Anne-Marie Nicol ha Céline Le Forestier a zo sonerezed div-ha-div bombard-biniou, en o douar-gwinizh get tonioù Bro-Gwened ha Bro-Pourlet. Dait d'ar fest-noz gwisket èl boudiged !

AN ORIENT / LORIENT

Orga. *Circle Brizeux*

PALAIS DES CONGRÈS | 21:00 | 10€ | 02 97 83 56 86

LUN. LUN 10.02 > VEN. GWE. 14.02

SEMAINE DE LA CUISINE BRETONNE SIZHUNVEZH GASTRONOMIEZH BREIZH

Tout au long de la semaine, les usagers du restaurant municipal pourront savourer des recettes bretonnes. Partenaire des Deziouù depuis plus de 20 ans, le restaurant municipal propose des plats à base de produits bretons et de productions locales. La salle de restauration, décorée aux couleurs des Deziouù et de la Bretagne, plonge les convives dans une ambiance authentiquement bretonne. De plus, les élèves des écoles bénéficieront d'une journée dédiée à un menu breton.

A-bad ar sizhun, e c'hello pratiked ar preti-kêr tañvad rekipeoù a Vreizh. Keveler an deizioù abaoe pasiñ ugent vlez, e kinnig ar preti-kêr pladadoù alejet get produioù breton ha gounidet er c'hornad. Kinklet e vo ar sal-pred get livioù Breizh hag an Deizioù, evit lakaat ar gouvidi en un aergelc'h breizhat gwirion. Oc'h penn kement-se e vo, er skolioù, un devezh gouestlet da geginerezh hor Bro.

AN ORIENT / LORIENT

Orga. *Mairie de Lorient*

RESTAURANT MUNICIPAL & ÉCOLES DE LORIENT

SPECTACLE / ARVEST

SAM. SAD. 08.02

MIG PENN GOMEZ - LA SAUVAGEONNE



Mig, surnommée la sauvageonne, aime courir pieds nus dans les chemins creux, sentir la chaleur du soleil et les caresses du vent sur sa peau. Une feuille de laurier qui chante est pour elle un cadeau plus précieux que bijoux, or et argent. Son histoire est une histoire de secret, de promesse, de malédiction, de métamorphose, de persévérance. Parce qu'elle est une femme libre, volontaire et courageuse, rien ne l'arrêtera pour trouver l'amour.

Spectacle conté par **Monique Répécaud**, accompagnée à l'accordéon diatonique par **Yann-Fanch Perroches**.

Mig, lesanvet ar goudaskenn, a blij dezhi redek diarc'hen en ivarzhoù, klevet tommder an heol ha paradennoù an avel à he c'hrochen. Dezhi emañ kant gwell un delenn lore hag a gan evit nand eo bizoù, aour hag argant. He istoer zo istoer ur sekred, ur mallozh, un treuzfurmadur, un istoer dalc'husted ivez. Plac'h dishual, youlek ha kalonek èl m'emañ, netra na den ne barray doc'hti a gavout ar garantez.

Un arvest kontet get **Monique Répécaud**, ambrouget get **Yann-Fañch Perroches** doc'h an akordeon diatonek.

LANGEDIG / LANGUIDIC

Orga. *Médiathèque de Languidic*

AUDITORIUM DE L'ESPACE DES MÉDIAS ET DES ARTS

17:00 | À PARTIR DE 8 ANS

DIGOUST / GRATUIT | 02 97 65 19 18

VEND. GWE. 14.02

MER. MER. 12.02

LES OISEAUX DU MARAIS DE PEN MANÉ EVNED GWERNIOÙ PEN MANÉ



Découverte des oiseaux du marais. Balade accompagnée par Madame **Anita Deniaud** et le garde fédéral. Apporter des jumelles et une tenue adaptée à la météo.

Dizoloiñ evned ar gwernioù. Baleadenn ambrouget get an ltron **Anita Deniaud** ha gward ar c'hevre-jiboez. Kasit jumelloù genoc'h ha dilhad doc'h an amzer a vo.

LOKMIKAELIG / LOCMIQUÉLIC

Orga. Bretagne Vivante

RDV : ARRÊT DE BUS SALENGRO

DIGOUST / GRATUIT | 14:00 | LORIENT@BRETAGNE-VIVANTE.ORG

MER. MER. 12.02

CONFECTION D'ÉPINGLES DE PARDON FARDIÑ SPILHOÙ-PARDON ATELIER MODE / STAL GIZ

Atelier intergénérationnel : venez fabriquer votre propre épingle de pardon et ramenez chez vous ce petit bijou traditionnel et porte-bonheur breton.

Atelier evit an holl rummadoù : dait da ober ho spil-henn-pardon deoc'h-c'hwi ho-kunan, ha distroit d'ar gêr get ar vizaouennig hengounel-se, doug-eurvad ar Vre-tened.

RIANTEG / RIANTEC

Orga. Mairie de Riantec

ESPACE DE VIE SOCIALE EFFET MER

DIGOUST / GRATUIT | 14:30

SUR INSCRIPTION AUPRÈS DE L'EFFET MER :
effetmer@mairie-riantec.bzh OU 02 97 33 52 66

FEMMES DANS LA COLLABORATION MAOUZED ER C'HENLABOUR CONFÉRENCE / PREZEGENN



Conférence de **Fabien Lostec**, chercheur en Histoire et auteur de «*Condamnées à mort*» : L'épuration des femmes collaboratrices, 1944-1951, CNRS Éditions (2024).

Au sortir de la guerre, 651 femmes sont condamnées à mort pour collaboration ; 46 seront finalement exécutées. Jamais, depuis la Révolution française, autant de femmes n'avaient été condamnées et mises à mort en si peu de temps. Qui sont-elles, comment ont-elles collaboré et qui les juge ? Fabien Lostec brosse le portrait individuel et collectif de ces femmes : une analyse historique novatrice qui déconstruit résolument l'image de la collaboratrice sentimentale.

Une séance de dédicace vous est proposée à l'issue de la conférence.

Prezegenn get **Fabien Lostec**, klaskour àr an lstor hag aozer «*Condamnées à mort*» : L'épuration des femmes collaboratrices, 1944-1951, CNRS Éditions (2024).

